

Chanson

Var an adieu o deus grêt ar zoudarded milie a Garahen,
a Zant-Briec, o sortial eus a Kreiz-Izel.

(242)

Var tou Chanson ar Martolod.

Va breudeur paour, p'on eus bet ar billet,
Allas! dre 'r sort, setu ni soudardet.

Ret e partia
Evit servicha
Hoy Roue a Frans,
Hep ober rezistans.

Qent evit mont ha quitat hor c'hanton,
Greomp hoy adieu d'an oll dre ur chanson,

M'ellimp he c'hana
D'ou divertissa
Etrezomp tout
Pa vionp oll er rout.

(243)

Ne zonzomp nui e labour hor c'hartier;
Enep feson chench a rezoomp a vicher;

Elec'h hostillion,
Hoy eus fusuillion;
Heuillomp hor g'is,
Disqomp an exersis.

Quitat a reomp hon dillajou a greñ,
Evit doug'en pelloc'h habijou quen;

Tog bordet, cleze,
Dre urz ar Roue,
Ha fourraimant,
Ret eo beza contant.

E plas hoy tad hoy eus eur c'habiten,
Evit hor mestr on eus offiserien.

Ret e deomp senti,
Oute hep contesti,
Ne ve o c'haneñ
A gouese var hor pen.

(244)

Rejouisomp hor c'halon, tud yaouanq,
 Pa renqomp mont, quiteomp hor nec'hamant;
 Canomp hor chanson,
 A greis hor c'halon,
 Gant cals a joa,
 Criomp: Vive le Roi!

Greomp hon adieu, rac bêr eo ar amzer,
 Deut er pœnt da quitât hor c'hartier;
 Adieu d'ar c'hêriou,
 Ha d'ar pœresiou
 Eus a Vretagn,
 Mont a reomp e campagn.

(245) Tadou, Mamou, adieu a galon vad,
 Glac'har hon eus e renqout o quitât.
 Ni bedo Doue,
 Ha c'houi, grit ive,
 M'ar teuimp d'hor bro:
 Adieu, qen a verzo.

Adieu, va breudeur, haq ive c'hoarezet,
 A galon vad, qerent ha mignonet,
 Adieu, bêlezen,
 Noblans, bourc'hisien,
 Payzantet,
 N'on ancouahait qet.

(246) Tud demezet a q'êr ha var ar mès,
 Adieu d'ar oll, qement zo er bares;
 Adieu, soudarded,
 A galon parfet,
 Gant cals a joa
 Criomp: vive le Roi.

Oll dud yaouanq, adieu a galon vad,
 Goaset, plac'het eus a bep sort stad;
 Adieu, mestrezet,
 Adieu ta, plac'het,
 Gant cals a joa
 Ni a garre ho priata.